

LEVRIOU AR VUGALE

Gwenn-erc'h

hag ar seizh Korrig

10

AL LIAMM

1957

**Gwenn-erc'h
hag ar seizh korrig**



AL LIAMM

Un deiz ma oa gwisket pep tra gant erc'h, hag an heol o parañ goude ar gorventenn, e teuas ur rouanez da wriat e-kichen he frenestr. Ha petra a glevas nemet c'hwitelladenn ur bir ha trouz ul labous o kouezhañ.

Sevel a reas ha stouiñ da welout.

Ha petra a welas nemet ur pezh mell bran du war an erc'h, hag ar gwad o strinkañ diouti.

« O ! » emezi bamet, « nag e karfen kaout ur verc'hig a vije ken du he blev ha pluñv ar vran, ken gwenn he c'hroc'hen hag an erc'h, ken ruz he divjod hag ar gwad ! »

Hag evel-se e voe ganet ur verc'hig gant blev ken du ha pluñv ar vran, divjod ken ruz hag he gwad, kroc'hen ken gwenn hag an erc'h.

Hag e voe anvet Gwenn-Erc'h.

Siwazh, mervel a reas ar rouanez. Hag ar roue a gemeras ur wreg all hag a oa kaer-eston, met lorc'hus-bras ivez : ne oa ket evit gouzañv e vefe war an douar kaeroc'h maouez egeti.

Ur melezour-hud a oa ganti, ha mont d' e gavout a ouie ober, ha goulenn digantañ tra ma selle ouzh he dremm ken kaer :

« Lavar din, va melezour, ha lavar din gwir,
Eus holl merc'hed ar vro piv eo ar gaerañ ? »

Hag ar melezour a responte :

« C'hwi, rouanez, eo an hini gaerañ. »

Kaeroc'h-kaerañ bemdez avat e teue Gwenn-Erc'h da vezañ ha pa voe seizh vloaz e oa ken splann hag an heol e-kreiz an deiz.



Hag ur wech m'edo ar rouanez dirak he melezour o c'houlenn :

« Lavar din, va melezour, ha lavar din gwir,
Eus holl merc'hed ar vro piv eo ar gaerañ ? »

Hemañ a respontas :

« C'hwi, rouanez, a zo kaer, met kalz kaeroc'h c'hoazh egetoc'h eo Gwenn-Erc'h. »

O klevout kement-se, glas gant kounnar hag avi, e c'halvas ar rouanez fall unan eus he mevelien hag e lavaras dezhañ :

« Kemer Gwenn-Erc'h ganit d'ar c'hoad-meur ma ne welin mui biken anezhi. »

Hag ar mevel a gasas anezhi rust gantañ don er c'hoad bras. Met truez a savas ennañ p'en em lakaas-hi war he daoulin ha pediñ anezhañ da lezel ganti he buhez.

« Plac'hig koant, plac'hig kaezh, » emezañ o tec'hout kuit, « droug ebet ne rin dit. » Ha disammet e voe e galon raktal, daoust ma ouie mat e vije sur a-walc'h drailhet ha dispennet ar baourkaezhig gant al loened gouez.



Ha Gwenn-Erc'h a redas er c'hoad don, pennfollet ha spontet-holl gant yudadenoù al loened gouez. Met hini ebet eus ar re-mañ ne reas droug dezhi ha diouzh an abardaez e tegouezhas dirak un ti bihan.

Hag hi mont tre.

Pep tra e-barzh a oa naet ha renket-brav : an daol, goloet gant ul lien gwenn-kann, a oa warni seizh asied bihan gant seizh torzhig vara ha seizh gwerennig leun a win, ha seizh koñtellig, ha seizh fourchetezig, holl lakaet brav en o lec'h.

Hag a-hed ar voger e oa seizh gwele bihan.

Neuze, dre ma oa deut naon bras dezhi, e tebras ur begad eus pep torzh hag ec'h evas ur veradennig eus pep gwerennad.

Ha c'hoant kousket a zeuas dezhi. Ober a reas neuze un taol-esañ gant an holl gweleoù bihan ; hag unan anezho a oa re hir hag un all re verr, betek ar seizhvet hag a oa mat-tre eviti. En em deurel a reas warnañ ha menel kousket.



Diouzhtu goude e teuas tre perc'henned an ti, seizh korrig bihan anezho, hag a oa o vevañ er menezioù, e-lec'h ma ouient toullañ amañ hag ahont da glask mein prizius hag aour. Seizh kleuzerig war enaou a oa ganto, ha raktal e voe anat dezho ne oa ket reizh pep tra.

« Piv zo bet oc'h azezañ war va skabell ? » eme an hini kentañ.

« Piv zo bet o tebriñ diouzh va asied ? » eme an eil.

« Piv zo bet o laerezh un tamm eus va bara ? » eme an trede.

« Piv zo bet o c'hoari gant va loa ? » eme ar pevare.

« Ha piv 'n deus graet gant va fourchetez ? » eme ar pempvet.

« Ha piv 'n deus troc'het gant va c'hoñtell ? » eme ar c'hwec'hvet.

« Ha piv 'n deus evet gwin diouzh va gwerenn ? » eme ar seizhvet.

Neuze e sellas an hini kentañ en-dro dezhañ hag e lavaras :

« Piv zo bet o c'hourvez war va gwele ? »

Hag an holl re all a zeredas davetañ ha pep hini anezho a lavaras heñvel : e oa bet un bennak war e wele.

Ar seizhvet, avat, a welas Gwenn-Erc'h, ha gervel e vreudeur. Hag e voent holl souezhet ha boemet, hag e tegasjont pep hini e gleuzerig da c'hallout sellout gwelloc'h outi, hag e lavarjont : « Nag ur plac'hig koant, nag ur cheo-rennig ! » Ha dudi o doa o sellout outi, ha trouz ebet na rejont, rak aon da zihuniñ anezhi.

Hag ar seizhvet korrig a gouskas gant ar c'hwec'h all, pep hini d'e dro, betek ma voe aet an noz da get.

Gwenn-Erc'h diouzh ar beure a gontas dezho he doareoù ha truez o 'doe outi. Hag e lavarjont dezhi e c'hellfe chom ganto hag e tiwallfent mat anezhi gant ma talc'hfe pep tra en urzh ha ma rafe ar gegin evito, ma walc'hfe o dilhad, ha ma nezfe ha ma rafe stamm evito.



Neuze ez ejont kuit diouti da glask e-doug an deiz aour hag arc'hant ar menezioù. Ha Gwenn-Erc'h a chomas er gêr. Hag e lavarjont dezhi a-barzh mont : « Taolit evezh ; ne vo ket pell a-raok n' he devo dizoloet ar rouanez pelec'h emaoch bremañ ; rak-se na lezit den ebet da zont tre ».

Ar rouanez, avat, bremañ pa gave dezhi e oa marv Gwenn-Erc'h, a gave dezhi ivez e oa ar vaouez kaerañ er vro. Dirak he melezour ez eas ha goulenn digantañ :

« Lavar din, va melezour, ha lavar din gwir,

Eus holl merc'hed ar vro piv eo ar gaerañ ? »

Hag hemañ a respontas :

« C'hwi, rouanez, a zo an hini gaerañ er vro-mañ. Met en tu-hont d' ar seizh menez, e-kichen ar c'hoad glas, e-lec'h ma vev seizh korrig, eno emañ Gwenn-Erc'h o kuzhat. Ha kaeroc'h kalz evitoc'h eo, rouanez ! »

Gwall chalet e voe ar rouanez, rak gouzout a rae na lavare morse ar melezour gaou ebet ha kompren a reas e oa bet touellet gant he mevel. En em wiskañ a reas neuze evel ur vaouez kozh ha treuziñ a reas ar seizh menez betek al lec'h m'edo ar seizh korrig o vevañ.

Skeiñ ouzh an nor a reas ha youc'hal :

« Traoù mat da werzhañ ! »

Gwenn-Erc'h a sellas er-maez dre ar prenestr :

« Demat deoc'h, moereb, petra hoc'h eus da werzhañ ? »

« Avaloù, avaloù brav, per ha kraoñ ! »

Met Gwenn-Erc'h a lavaras dezhi :

« Ne gredan ket lezel ac'hanoc'h da zont tre, rak ar Gorriged o deus difennet ouzhin. »

« Grit evel ma karit, » eme ar rouanez, « met da nebeutañ kemerit an aval brav-mañ ; ur prof eo a ran deoc'h. »

« Nann, » eme ar verc'hig, « ne gredan ket ! »

« Plac'hig droch, » a respontas ar wrac'h, « aon rak petra hoc'h eus ? Ha kavout a ra deoc'h ez eo kontammet ? Dalit ! Debrit un tamm anezhañ, ha me a zebro un tamm all. »

— Rak ma oa un tu eus aval kontammet, egile ne oa ket ! —

Neuze, ken brav e oa ar frouezhenn ma n'hellas ket Gwenn-Erc'h mirout a zebriñ un tamm anezhi.

Met kerkent ha ma voe an tamm en he genou, e kouezhas marv war al leur.



« Ar wech-mañ avat netra n'hello saveteiñ ac'hanoc'h, »
eme ar rouanez. Ha, distro er gêr, na laouen e voe he c'halon
fallakr pa lavaras dezhi erfin he melezeur :

« C'hwi rouanez a zo an hini gaterañ e-touez an holl re
gaer. »

D' an abardaez, pa zeuas ar gorrigez d' ar gêr e kavjont
Gwenn-Erc'h astennet a-hed he c'horf war al leur-di. Sevel
he fenn a rejont, ha kribañ he blev, ha gwalc'hiñ he dremm
gant dour ha gwin ; holl en aner : ar plac'hig a seblante
bezañ marv-mik. Hec'h astenn a rejont neuze war ur gwele,
ha tri devezh leun e chomjont eno da veilhañ ha da leñvañ.
Ha divizout a rejont, ken koant ha ken livrin e oa chomet he
c'hroc'hen, na lakfent ket anezhi en douar yen, met en un
arched gwer e-lec'h ma c'hellfent dont alies da sellout outi.
Ha war an arched e voe skrivet hec'h anv, hag e oa merc'h
d' ur roue.

Hag e voe lakaet war gern ar menez, hag atav e chome
unan eus ar seizh korrigez en he c'hichen da ziwall.

Hag holl loened ar c'hoad, hag holl laboused an neñv a
zeuas ivez en-dro dezhi da glemm ha da gañvañ.



Hag evel-se e chomas Gwenn-Erc'h pell-pell amzer. Ha daoust da se e vije bet lavaret na oa nemet kousket. Rak ken du ha pluñv ar vran e oa atav he blev, ken ruz he divjod hag ar gwad, ken gwenn he c'hroc'hen hag an erc'h.

Un deiz e teuas ur priñs da welout ar gorrighed. Gwelout Gwenn-Erc'h a reas ha lenn pezh a oa skrivet e lizherennoù aour war an arched.

Kinnig a reas neuze d'an dudigoù vihan ur bern arc'hant hag aspediñ a reas anezho d' e lezel da gemer Gwenn-Erc'h gantañ.

« Evit holl aour ar bed, » emezo, « ne vo lezet den d' he c'has gantañ. »



Kement e aspedas ar priñs, avat, o lavarout e varvje gant ar glac'har ma ne vije ket roet Gwenn-Erc'h dezhañ, ken o devoe ar Gorraged truez outañ hag ec'h asantjont. Met a-boan ma oa bet dibradet an arched, an tamm aval a oa chomet etre dent Gwenn-Erc'h a gouezhas eus he genou hag ar plac'hig yaouank a zihunas en ur lavarout : « Pelec'h emeon ? »

« Ganin, » eme ar priñs, « ha n' hoc'h eus aon ebet da gaout. » Hag e lavaras dezhi pep tra a oa c'hoarvezet, hag e kare anezhi muioc'h eget pep tra er bed. « Deuit ganin e ti va zad, » emezañ c'hoazh, « hag e timezot ganin. »

Ha Gwenn-Erc'h a lavaras ya. Hag evit o eured e voe graet ur fest bras ha pedet ur bern tud.

Ha piv a voe pedet ivez, a gav deoc'h, nemet enebourez kozh Gwenn-Erc'h, ar rouanez.

Ha tra ma oa o lakaat warni an dilhad kaerañ ha pinvidikañ he doa e selle ouzh he skeudenn er melezour. Goulenn a reas outañ :

« Lavar din, va melezour, ha lavar din gwir,

Eus holl merc'hed ar vro piv eo ar gaerañ ? »

Hag ar melezour a respontas :

« C'hwil, rouanez, a zo an hini gaerañ amañ, met kalz kalz kaeroc'h egetoc'h eo ar rouanez nevez. »

Lammat a reas ar rouanez gant ar souezh hag ar gounnar ; met ken bras e voe hec'h avi hag he c'hoantgouzout ma n'hellas ket mirout da vont d'an eured. Ha p'en em gavas eno ha pa welas piv e oa ar rouanez nevez, e vougas gant an imor hag ar gasoni, hag e kouezhas marv war an dachenn.

Met Gwenn-Erc'h hag he gwaz a renas war ar vro bloavezhioù ha bloavezhioù, hag a voe eürus betek o deiz diwezhañ.



LEVRIOU AR VUGALE

1. PAOTR E VARO GLAS 150
2. MERC'HIG AR ROZENN 150
3. AR C'HEMENER BIHAN KALONEK . 180
4. ROBINSON KRUZO 180
5. ISTOR MEUDIG 150
6. AR GOANTENN E KOAD AR
C'HOUSK 150
7. AR C'HAZH GANT HEUZOU LER . 150
8. LUDUENNIG 150
9. KABELLIG RUZ 150
10. GWENN-ERC'H HAG AR SEIZH
KORRIG 150

P. BODENAN, 3, Chemin des Potiers,
Erqué-Armel, Quimper. - C.C.P. 212-23 Rennes

Pep gwir miret strizh gant BIAS hag AL LIAMM

